



12 – Ar blouzenn verrañ (Traditionnel, G. Philippe)

Gilbert PHILIPPE a traduit en breton cette chanson bien connue en français et l'a adaptée à un air d'an dro.

AR BLOUZENN VERRAÑ

La courte paille

Tri martolod, int yaouank flamm
War ar mor bras o deus lestreet

E-pad seizh vloaz war ar morioù
Hep damwelout douar ebet

A-boan tremenet ar seizh vloaz
Bara ha gwinn o deus manket

Tennañ plouzenn verrañ a vo ret ober
Da welout piv a vo debret

Ar c'habiten da reiñ ar plouz
An hini verr en deus kemeret

Ni a zebrfe hor c'habiten
A zo ganeomp-ni ken karet

A nann ! A nann ! eme ar mousig
A nann, biken ! Se ne vo ket

*Trois tout jeunes matelots
Sur la grande mer ont embarqué*

*Pendant sept ans, sur les mers
Sans apercevoir aucune terre*

*À peine les sept ans passés
Le pain, le vin vint à manquer*

*Il faudra tirer la courte paille
Pour voir qui sera mangé*

*Le capitaine a donné les pailles
Il a pris la plus courte*

*Mangerons-nous notre capitaine
Que nous aimons tellement ?*

*Oh non ! Oh non ! dit le petit mousse
Oh non, jamais ! Cela ne se fera*

Hag evidoc'h, ma c'habiten
E c'houzañvin marv kalet

Mousig brokus ha kalonek
Evit se, te a vo gopret

Evit se, te a vo gopret
Ur sac'had aour, dit a vo roet

Ma merc'h yaouankañ da zimeziñ
Ur c'hastell kaer nevez savet

Mirít hoc'h aour, merc'h ha kastell
Douar a bep tu e weler

Sed-aze tourioù Babilon
Ha seizh kalvez warno pignet

Deñved o peuriñ el lanneg
Gant teir berjelenn, mesaet

An hini goant, ma mestrezig
Am c'har hag a garin bepred

*Et pour vous, mon capitaine
Une mort cruelle je souffrirai*

*Petit mousse généreux et plein de cœur
Pour cela tu seras récompensé*

*Pour cela tu seras récompensé
Un sac d'or te sera donné*

*Ma plus jeune fille à marier
Un beau château nouvellement bâti*

*Gardez votre or, fille et château
On voit la terre de tous côtés*

*Voici les tours de Babylone
Et sept charpentiers y sont montés*

*Des moutons qui paissent sur la lande
Gardés par trois bergères*

*La plus belle, ma maîtresse
Qui m'aime et que j'aimerai toujours*